

- 17 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

92. GWERS AR PERSON

(follennoù 6 - 8)

Sellaouit eun exempl a zo gwirion
Zo arruet e ti eur person

Pini a nevez bed an enor
Da leina gant on redemptor.

Ar person zo eun den santel
Mat d'ar paour, devot d'ar Salver.

eun devez e ias da offerena
Ne keve den den servicha.

Ar c'hloc'h a sonne alliez
Mes na deue den d'en iliz

eur paour e nem represantas :
De servicha en em offras

Stouet a re d'an daoulin
Da saludin or mest divin

Stouet a re dirag an oter
Da rentan grassou don Salver.

Pa voa e offern selebret
gant ar paour e voa chervichet

Pidi a ras anezan
Da zijuni a da leinan :
- evid ho poan dam servicha"

Ar plac'h entreas en koler
Pa velas ar paour gant he breur,

- 18 -

en eur lavaret d'ar person :
- pebeus kompagnon polisson
A zo oc'h ta eul-te, aillon !

—
- Tevit, va c'hoar, na leverit ger
emar en devez va servichet,

—
A pan 'devez va servichet
Just e ve e ve rekompanset !

—
Entre a eure er jardrin
A goude se devoe goal fin.

—
Ar person a interrojas
ar paour pa voant gant ho repas.

—
Mar bije netra a nevez
Deus ar brezel ag ar gernez

—
Brezel a vo ne pado ket pel
ag ar gernez a finisso
an eost puissant a vezo.

—
- Mer karfe e vec'h en o tezir
ar c'helo-se da veza gwir

—
- Ker gwir, otro, eo ar c'helo
A ma zeo er jardrin maro
o c'hoar dre eun transport miserabl
peder aër o suna he goad.

—
Ar person souezet deus he klevet
Ag a retornas da vellet.

—
Pa entreas er jardrin e voa maro
Ag ar peder aër var he zro

—
Retorn a eure en dro
Da hannonç d'ar paour ar c'helo

—

- 19 -

pa entreas ebars an ti
en plass ar paour voa eur grucufis.

—

Stouet a eure dan daoulin
Da saludi or mest divin

—

Setu i maro ag enterret
Vel meur a hini zo var ar bed

A zo ingrat doc'h ar beorien
pere zo e glask an aluzen.

~~~~~

Jannet Puill, 9 févr. 1851

~~~~~